

DEZREVELLOÙ AN DUD KENFINET RÉCITS DE CONFINÉS

*Kouezhet eo ar bac'hadur evit an eil gwech warnomp.
Diouzhtu eo deuet ar goulenn petra emamp o vont d'ober
e-pad tout an amzer-se rak n'eus ket moaien da vont er-
maez e-pad muioc'h eget un eurvezh ?*

*An dra gentañ a ran diouzh ar mintin eo lenn ar gazetenn
hag a-wechoù levrioù 'moa da lenn abaoe ur mare.*

*War-lerc'h, ma vez brav an amzer e krogan gant labour al
liorzh e-lec'h zo bepred un dra bennak d'ober evel troc'hañ
al leton. Krennañ girzhier a ran (tailler les haies).*

*En ti zo labourioù d'ober ivez evel adlivadur ar
c'hambreier.*

*Bep devezh e valan un eurvezh tro-dro ma zi betek ur Km
hepken. Pa choman er gêr e sellan ouzh ar skinwel a-
wechoù hepken, ha labourat a ran un tamm diwar
kentelioù brezhoneg, ha pellgomz a ran d'ar familh ha d'ar
mignoned, ha renkañ a ran fotoioù.*



Gerard (live kaozeadenn)